

68

GWERZ SANT EDERN.

Tennet diavar eur Werz all irroc'h.

- 1 Selaouit oll , compagnuez ,
Selaouit cana eur vuez ,
Buez an Aotrou Sant Edern
Ar Patron euz ~~a Bleudern~~, *parez Edern*
- 2 En Enezenh anvet Irland
E verker oa ganet or Zant ;
D'en gallouduz, d'en a c'hened
Evit ar c'horf ag ar spered.
- 3 Var e vadou , e iaouankiz
E reaz abred fae a dispriz ,
Vid clasq rouantelez an nev
A silvidigez de ene.
- 4 Diouz e dud e kimiadaz ,
De vro adie e lavaraz ,
Ag e var vor da zont e Breiz
Evit prezeg eno ar feiz.
- 5 En eul lec'h var aod kerne
A demdost da Zouarnene
Anvet ar Juk brema c'hoaz
Gat e lestrig e touaraz.
- 6 Da glask eul lec'h cuz a sioul
Vid tec'hed pell diouz ar foul
E loj en eur c'hood a gemer
Eun diou pe deir leo diouz Kemper.
- 7 Eb douja da neb seurd amzer
E viscamant a voa dister.
E wele aoe an douar ien
Gat eur mean a zindan e benn.
- 8 Gourizou reun a zougenne
Gat bara groz e tremene ,
A gat louzou euz e jardin
Eb eva Morse berad gwin.

— 2 —

- 9 Epad un darn vad eus an noz
 Ar beden a oa e repoz ;
 Outa e unan didruez ,
 Ouz e nesa leun drugarez .
- 10 Gouscoude teodou an dud
 A glaskaz rei deza gwal-vrud ;
 Gouzav a ree gat an dud-criz ,
 Gouzav a ree oll dispriz .
- 11 An Aotrou euz a Gistinit
 A fachaz ouz e vioc'hiq ;
 Ma laoskaz varnezi e chas
 A chom al loen var ar plas .
- 12 Edern dont ; a var a gounter
 Ar vioc'h senti var ar ger ,
 Sevel ac'hano a mont kuit .
 Ez a bark Aotrou Kistinit .
- 13 Direiz e cavet al loen ,
 A ne esperne douar den ;
 An oll a glemme er c'harter
 Ag a lavare oa laer .
- 14 Mes an dud-ze ne ouient ket
 Burzudou Doue pa vez red :
 Var a gonter , el lec'h peuret
 Eo e save ar gwlla ed .
- 15 Doue a roaz d'on ermit
 Ar c'hoantegez da dec'het kuit ,
 Rag e galon n'oa ket digor
 Dar meuleudi na dan enor .
- 16 Dre gerne e redaz calz bro ,
 Ma cavaz eur plasig distro ,
 A sevel eno eul lojenn ,
 Da bedi , d'ober pinigenn .
- 17 Eno e reaz meur a vurzud ,
 Ma redaz anezan ar brud ,
 Noa seurd poan na seurd clenved
 Na gave dezo ar remed .
- 18 Eur feunteun a oa e kichen
 Al leac'h ma savaz e lojenn ;
 Edern a reaz eno sevel
 D'ar Verches-Vari eur Chapel .

— 3 —

- 19 Breman eo anvet Lanedorn,
Enni e peder Sant Edern ;
Eno e raaaz, en e vuez,
Meur a viracl, a goudevez.
- 20 En dejentil o chasseal,
Araog e chas en aneval
A redaz evel da c'houlenn
E loj ar Sant cuz a diffenn.
- 21 Eur c'haro oa, a penn gwelaz,
Dirag Sant Edern e stouaz,
Vit outan en em erbedi
A goulenn digorr en e di.
- 22 A ma chomaz ar c'haro ~~xe~~
Var dro Edern divar neuze.
Peuri a ree var an deiz
A dont bemnoz de lojeiz.
- 23 An Aotrou a oa souezet
Gant ar seurt burzud c'hoarvezet,
Ma rank Edern deza discuez
Galloud Doue, e vadelez.
- 24 Kent an Aotrou c'hoaz ne ouie
Anavout mad an den Doue ;
Neuze en pedaz a galon
Ma c'houlennje deza pardon.
- 25 Var ar gounter, an Duk a Vreiz
A erruaz gatan eun deiz
Tremen eharz an ermitaj
Ouz Edern e comzaz eur paj.
- 26 Edern a oa gant e bedenn
Ne respountaz ket trum dan den
Ag ar Sant en doe ragtal
Eun taol digat an den brutal.
- 27 Edern, var scuer e vestr Jezuz
A oa den dous a gouzavuz,
A ne gemeraz droug ebed
Laouen da veza disprizet.
- 28 Ker buan, var a zo scrivet,
Duk ag e dud coll ar gwlet,
Doue o falvout discuez scuer
O welet skei e zervicher.

— 4 —

- 29 An Duk ag e gompagnuned
Da vro Leon o clask monet,
En em gavaz nec'het maro ,
Ne anavezent ket ar vro.
- 30 Sant Edern ober eur bedenn
da c'houlen dezo sclerijenn ,
Rag Edern a greiz e galon
A ch'oulenne dezo pardon.
- 31 An Duk a voestaz e savze
Eun Ilis el lec'h ma vize
Dan eur ma welze sclerijenn
Da gaout sonj iviziken !
- 32 Evid gloar e zervicher
Doue a oe o c'hunduer ,
Ma errujont e bro Leon
Ag eno o doe o fardon.
- 33 Eno e teuaz ar gwelet
B'an Duk a de gompagnuned ,
Er plas ma savaz Plouedern
Ag ar Patron eo Sant Edern.
- 34 E Gwengolo , an deiz kenta
Eo ema ar Gouel ganta ;
An deiz eo ma z'eaz da repoz
Gant Jezuz en e Varadoz.
- 35 A ni irio , ~~Plouz~~-Edern
Pedomp a unan Sant Edern ;
En em erbedomp a galon
Ouz an ini zo or Patron.

Piè creditur, tutò negatur.

— FIN. —